



Troomp ha troomp atav !

Istor(ioù) ar c'hampouezh
e Breizh



LIVE 1
ADALEK 3
BLOAZ

Daoust ha pegennoù zo
e-barzh ho levrig ?

LEVRIG-C'HOARIOÙ

Degemer mat en diskouezadeg **Troomp ha troomp atav !** *Istor(ioù) ar c'hrapouezh e Breizh e mirdi breizhek an departamant*



Ha gouzout a rez tripañ krampouezh ? E Bro-C'hall e vezont tripet evit ar Chandelour a-wechoù, evit degas chañs ! Met e Breizh n'eo ket ken aes-se... Perak ? Abalamour ma vezont fardet war ur blakenn vras, pounner-tre, hag a vez graet pillig anezhi.

E Breizh eo pouezus-tre fardañ ha debriñ krampouezh. Un hengoun eo hag a vez graet a-rumm-da-rumm er familhoù pell zo. Pep hini e zoare d'ober : kalz rekipeoù ha jestroù a bep seurt zo !

En diskouezadeg-mañ e ri anaoudegezh gant traoù, ostilhoù hag istorioù hag a denn d'ar c'hrapouezh. Deskiñ a ri ez eo ar c'hrapouezh un afer jestroù, sekredoù ha mareoù da vevañ asambles dreist-holl.

Ha diwar vremañ emaut-te ivez en avantur lipous-se !

Gweladenn vat dit !

Evit fardañ krampouezh lipous
eo ret kaout ur billig a-zoare !

Evit kregiñ gant ar weladenn, lakaat
pegenn ar billig amañ.

Sell en-dro dit evit kaout sikour !

Er Mirdi ez eus un nebeud
reolennoù d'ober ganto :

- Arabat dit tostaat re ouzh an oberennoù
- Arabat dit touch d'an oberennoù
- Arabat dit diskouez un dra bennak gant da greion



Met er Mirdi e c'hallez ivez :

- Kaout plijadur, sellet
- Hunvreal, pourmen, treiñ ha distreiñ
- Sevel goulennoù
- Chom hep gweladenniñ pep tra ?



Kemer an ostilhoù a-zere evit fardañ krampouezh !



Sell mat er sal-mañ evit gwelet an holl armoù-kegin az po ezhomm anezho evit fardañ krampouezh lipous.

Laka ar pegennoù a glot gant an traezoù amañ dindan.



Deomp d'ar sal war-lerc'h bremañ...

Degemer mat en ti-krampouezh



En tiez-krampouezh e kaver alies traoù kozh hag a vez implijet en ur mod all evit kinklañ ar salioù. Listri pe arrebeuri hag a zegas da soñj eus gizioù gwechall.

Klask ar pezh arrebeuri-mañ.



Amañ emañ evit kinklañ ti-krampouezh ar mirdi, met gwechall e servije d'un dra bennak all en tiez...

Hervezout, penaos e veze implijet ar pezh arrebeuri-mañ ? Kelc'h ar respont mat.



En em walc'hiñ



Debriñ



Kousket

Laka ar pegennoù a glot evit klokaat ar c'hinkladurioù mod Breizh ez asiedoù..

Sell ouzh an asiedoù a zo er sal evit kaout sikour.



Mirdi Lipouz



War ar blasenn vras-se e Kemper emañ deiz ar marc'had. Gwelet a reer an dud gant o dilhad, gwelet e vezont o tañsal, o werzhañ traoù, o seniñ... hag o tebriñ ivez !

Bez' ez eus ur grampouezherez kuzhet en un tu bennak en daolenn-se.

Ha kavet ez peus anezhi ?

Laka ar pegennoù a glot evit klokaat an daolenn-mañ.

Sell ouzh an daolenn orin er sal evit kaout sikour.



Deomp d'ar sal war-lerc'h bremañ...





Emaout dirak ar skeudenn
gentañ ma weler
krampouezh da werzhañ !

*Laka livioù en-dro war
an daolenn vray-se.*



Na zisoñj ket klokaat an
daolenn gant ar pegennoù !



Deomp d'ar sal war-lerc'h bremañ...



Eus ar greun

d'an asiedoù



Ul liamm start zo etre al labour-douar hag ar boued. Ar c'hrapouezh a vez fardet gant bleud, hag evit kaout bleud eo ret kaout greun. Gallout a reer fardañ krampouezh gant bleud a bep seurt.

Gant sikour al luc'hskeudennoù a zo er sal, tres ul liamm etre pep tra hag ar pezh a reer gantañ.

Klask an 3 skritell bruderezh ha kloka anezho gant da begennoù.



Pal c'hreun



Ledañ ar greun, dezho da sec'hiñ



Freilh




Kemer ar greun ha cheñch plas dezho



Rastell c'hreun



Dornañ an ed evit dispartiañ ar greun diouzh ar pennoù-ed



Arkeologiezh ar c'hrampouezh e Breizh



Sell mat ouzh ar billig eus Tregeneg hag a zo eus ar 14-16^{vet} kantved.
Gallout a rez gwelet anezhi er sal.
Kelc'h ar skeud a glot.



Gallout a reer ober bleud diwar plant eus ar bed a-bezh. Klask ar skeudenn-mañ eus "ed-Turkia" ha kloka anezhi gant da begennoù.



Deomp d'ar sal war-lerc'h bremañ...


Ar grampouezhenn ziwezhañ (La Dernière crêpe) Ondine Bertin, 2026



Oh chaous, aet eo an ed-du da get ha n'omp ket evit fardañ krampouezh ken ! Dirazout emañ ar grampouezhenn ziwezhañ er bed !
Evit kendelc'her d'ober ton d'ar c'hrampouezh, gra gant da begennoù evit klokaat ar grouidigezh-se gant an arzourez Ondine Bertin !





Tres amañ an dra a zo plijet dit ar muiañ en diskouezadeg-mañ



Trugarez dit ha ken ar wech all !

Evit lenn hor c'heleier ha reiñ da c'houzout
ar pezh ho peus bevet : cdp29.fr
Eus ar Meurzh d'ar Sul : 10e - 6e noz
Digoust d'ar Sul 1^{añ} eus ar miz

 musee.departemental.breton
 musee.breton

Hor c'heleier :

